



CHANSON AN DANÇOU

Var eun ton nevez.

Tostaît amâ, tud a sqient, me o ped hac o supli;
 Manet ezòn amâ bouhet gant va oll filosofi,
 Crignat a ràn va biziet, ha frotta a ràn va zal,
 Hep gallout birviqen compren, en laret, ràn
 hep farçal.

Ar charmantis d'ar yaouanqis da lampat ha da
 zançal.

An habitud-se a deu gante, me a gred, var
 an douar,

Pe autramant en contractont da dri bloas pe
 da bêvar,

Vit, p'ello ar grennardez et treina oc'hotillonen,
 Hac ar grennardet o-unan boutonio braguezen:
 Naeller pelloc'h o delbel, ar yaouanqis zo'no fen.

Eun tam oc'h diveat, bêleyen, d'o c'hervel
 d'ar c'hatekis,

Ha pa ve possubl ec'h alfec'h, da gass o c'horf
 d'an ilis,

O speret a zo en dançou, gant se ne raint netra,
 Da galz eus ho qestionou o guenoyou o lavar *ha!*
 Pa c'houlfet hac int vo christen, e respontint
ta la la.

Neuze ec'h efet en coler, hac o zrêtot a ezen,
 Ha gouscoude, m'en em sònchfec'h, n'en doc'h
 mann en o c'hichen :

Noc'h qet capabl, gant hoc'h oll studi, evelte
 d'en em beintàn :

Pelec'h oufec'h-u c'houilaqat jour en eur c'hoef
 doublet a ràn ,

Nac ho mouchouer en qalqen , pelec'h oc'h
 manet bremàn ?

Ne zeus libouden à bemp bloas na zesco
 dêc'h ho qentel ,

Bea o deus eur mizilour, pintet inten demezel,
 Dec'h e voa en e jaqeden, na vouie qet e *Fater* ,
 Dantelezet ê e c'hoefou, brodet ê e davancher ;
 Friset ê e c'hotelinen, rubanet e boutou lêt.

Me gred e clêvàn ar zoner savet var e variqen,
 Tano ê diouscouarn ar merc'het , sevel a reont
 o fenn ;

Deustu' commançont da vresqen adreus an ed,
 ar c'hleuyou ,

Vel pa ve an diaoul var o lerc'h, pe otramant
 an ancou ;

Ha pa ve an ifern da dreuji, bepret e zint d'an
 dançou.

Pa vint êrù var ar blenen elec'h ma vo an ebat,
 Evit n'em disquez d'ar botret, e clasqint eur
 c'hleus benac :

Neuze' fichint o davancher, e tressinto zoaleten,
 Evit pa dremeno potret charmi o amourousien,
 Rêida emâ ur zer-lagad d'eguile urc'hoarzaden,

C'hoes ar botret, pa dremenont, a ra strinca
 o c'halon ;

Odaoulagat so flamboesou alumet gant Cupidon:
 Trêi ha distrêi a reont tout, gant c'hoant da veza
 qerc'het.

Qement e c'hrillont gant anvi da veza souden
 hijet ;

Penevert n'en dê qet ar c'his, e larjent : hastit,
 potret.

Ar botret zo er c'hostez all destumet a van-
 dennou,

N'int qet' vit derc'hel o bragou, anez caout
 eur bretellou ;

Ema'l lèz en beg o friou, roet gant o mamou dê ;
 Tri anê n'en dint qet capabl da gass bioc'h d'ar
 c'holle ,

Cetu eno ar ganfardet a zo' tançal nos ha de.

Ne oun ha me a zo troublet, pa velàn peder
 demezel.

Pebabarapluisogante, me gredsei pesatin scler ;
 Ma vi je bet tom an amzer, o d'oa peb a barasol,
 Evit beza distinguet mat hac enoret gant an oll ;

O daouarn a zo maneguet, d'ampech roussa gant
an eol.

Patiantet, ô va Doue! n'allàn mui en em zouten,
Eun debiter, bennos Doue, n'eus eur montr en
e c'hodel;

Neus messaer moc'h na dêved, digoc'her saout
na gezec,

N'en deuseur bragou pont bian hac eur gilet en
fleuriet,

Na zoug e doc var e scouarn, eur c'horn butun
en e veg.

Pêvar ha pêvar e zeont da zaludio mestrez,
Ozoc en o dorne c'houlont : Be o po ar vadelez..

Hep gortos fin d'ar c'hompliment, ar plac'h a
respont *ia*;

Qement e deus c'hoant da lampat, qement e mâ
bras en joa;

E lec'h rêi deàn e c'houlen, e carfe en briatta.

En eur rond en em laqeont, evit commanç da
lampat;

Mar dê pec'het sellet dançal, o discoe n'en dê
qet mat.

Disparissit, jestou lubric, impudicationou,
Disparissit, disparissit. Danç, vocen an eneou,
Invantion au drouc-speret, evit boeta ar flamou.

Neuze' vo an demezelet n'int qet pedet da
zançal,

Oc'hober an dro d'an dançou, hac oute tout

façou fall ;

O minou a ziscoe facil int antreet en coler ,
Mantret e zê o c'halonou ; vit apesi o c'noler
Da gritica an dancierien ec'h implijint o amzer.

Sell , emei , pesort libouden a zo da zañçal
qerc'het !

Onnes a zo ur sovajen na voar na comz na qerzet ;
Sell penos e mâ e dillat ! sur ne deus qet teir ivis.
He zad zoe clasq e vara ; sellit ouseven d'am bis ;
Ouspen trêgont vloas neus bonnont, e blêo a zo
dija gris.

Sell peguersote zê onnese qichen e c'havalier !
Neus fors petral ar zoner, ne ra nemettêr-a-têr ;
An antrecha, an êlde pijon a ra tout gant al lete ;
Re bonner e zê e boutou, na zistag qet ar brize ;
Vals, chasse-huit n'ententont qet, na voar qet
ar balance.

Me a vel an eol o cuza , finissa ra an dançou :
Ar plac'het a lamp d'ar botret , da furchat o
godellou ;

Ret ê caout per pe avalou evit terri ar sec'het ,
Biqen navintlêzet tranqil, qen alavaro ar botret :
Antreomp en hostaliri, m'hor bomp eun dra
benaqet.

Complimantchou' rêi ar merc'het, pa gom-
mancint da eva ;

Mes na vo qet fin d'ar barti, na vo int vo ar goassa.
Goalc'hi reont o gorsailen, güin ha gist a dre-

menont ,

Scarzetê godel ar botret, ha bepret e leveront :
Qen a vo bet argüin-ardant, biqen d'ar guêrna
yêfomp.

Grial hac huchal a reont en hent bras var boes
o fenn ;

Annepo c'hlêse, a gredfe e ve eur foar o tremen :
P'êruint en o demeuranç, deus-tu' clasqint ar
c'haignou ,

Hane zeus den evit compren petra a reont eno ;
Badiantchou hep son clêyer alies zo'n effejou.

Ar plac'h nagavo potrebet zo en bêr instant
chanchet ;

Ec'boefalaq' var e bisach, adieu a laro d'ar bed ;
En e dorn zo eur chapeled, sauces e mâ o pedi ;
Pa sônh en amzer dremenet, ne ra nemet
hirvoudi ;

C'hoantedeus davont d'argouent, hamuic'hoas
da zemezi.

Cetui-ta en orêson ; hanvalê eus eur zantez ;
E ma'prometi da Zoue ferm na zemezo james ;
Essaara trompla Doue, mes e c'homzou a zolach
Racen istant ma cav eur pote tole froc er golach,
E têv habit ha chapelet evit commançar menach.

Trivac'h-vloas n'eus an dancerez ; pagaveur
potre teme ,

Hijetê bet hac adhijet coulz en nôs evel en de :
Arpez a van goude hijaa larerna dal netra'

Gouscoude ar potec'h emera so oll carguet a joa,
Ha var ben eun nebeut goude e laro *meâ culpâ*.

M'e güelfac'h ebars en dançou, ounnes a zo
eur fleuren !

Admira a rar botret e c'hoantis hac e sqient;
Excelant e voa d'al labour, menajeres argaëra,
Bep nôs diveat da gousqet, sevel a rê da guenta,
Preciussa greg a vije; mes chenchet e zê brêmâ.

Mar boa coant, pa voa plac'h yaouanc, brêmâ
ê vil da flêryal;

E c'hotillon zo cramennet, e blêo tennet var
e zal.

Dibren ê ganti e dillat, collet ganti e spillou,
Ar vic'hien demeuse fri a ziver en e guinou,
Evit e souch, hep n'em vastar, eo ret caout
pincetezou.

Sans cess e mâ o cluchenni e ti e c'homerezet,
Pried, bugale ha menach, oll e vent abandonet;
Ne voar na canna, na gualc'hi, na memes scuba
e zy,

Ne vanc na plous, na c'hoenn ennàn ; carguet ê
a loustoni.

Evit antren, hep vomissa, ê ret stoufastard ar fri.

Pa za'nitron var e zorchen azeet en e c'hoaze,
Ha pa ve an tân dindanni, na zavo qetac'hane;
Implijet ê tout ar voyen, na neus qen manet
netra,

Ret ê brêmâ chench a vicher, ret ê mont da

glasc bara.

An ozac'h, lec'h dont d'e c'honsoli, a deu prest
d'e bazata.

Cetu amâ eur zonneve, cetu amâ eun danç all:
Chasse-huit ê ret da ober, pe vea scòet ractal;

Ha pa vanco an danceres, deus-tu e devo eur
vazad,

Hac ouspen, tol troaden e reor, ma na ve buan
a droad,

An danç qenta' voa amiabl, mes omâ na nê qet
mat.

Finissa a ràn va Chanson, na bad pelloc'h va
sujet.

Ho pedi a ràn d'am excus, mar e meus oc'h of-
fancet.

Qement-mâ a zo abuzou, n'o güelomp nemet
re bemde,

Hac a deu, sivoas, re alies d'offanci ar Vajeste:
Bea int motivou indeçant eus a re a liberte.

F I N.



E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr.-Librer.